

SON AR VATEZ VIHAN

WAR DON : *Margeidig ha Loéizig*

An ev-ned a ri - chan, an heol a zo laou - en
 kae - rat eo ar me - ne gant e vleu - niou me - len, ô,
 kae - rat eo ar me - ne gant e vleu - niou me - len !

An evned a richan, an heol a zo laouen;
 Kaerat eo ar mene gant e vleuniou melen!...O! (Diou wech)

Brao eo d'ar messaer c'hoari war ribl ar waz,
 Ha d'an alc'houeder skanv tarnijal en oabl glaz;

Ha d'in, mitez vihan, kas lein d'ar vederien,
 'N eur ganan, dibreder a-hed ar wenojen.

Du-hont, er «Zouleg vras» 'man an dud oc'h êsti:
 Ouz eul lommig jistr mat e c'hoarzo pep-hini.

Ma bec'h a zo pounner, mes ma zroad a zo skanv;
 Frealzus eo poanial da zastum bara gouanv.

Ha penôz e c'hallfen klemm ha fall-galoni,
 Pa na strik en-dro d'in nemet c'hoarz ha dudi?

Mignoned diskiant a lar d'in a-wecho:
 — «Perak, mitez vihan, n'ez ket da vale bro?

«E Pariz ar vuhe a zo distur ha frank,
 «Karget a levenez evit an dud yaouank.» —

— Miret, tudou fallakr, hoc'h aliou diboell!
 Pariz eo mor islonk mitez Breiz-Izel!

Ped anê, tec'het fur ha prizet gant an holl,
 'Deus beuzet o enor 'n e wagennou diroll!....

Aman, e Breiz-Izel, gant poaniou ma diouvrec'h,
 Hep bezan pinvik bras, ma a vevo dinec'h.

Fe hag unvaniez, zoken er baourante,
 'Zo gwell eget madou e diavéz Doue!

Aze, er «Zouleg vras», 'man ma gwella mignon,
 Eur pôtr krenv e ziouvrec'h ha leal e galon.

Me 'meus tost da gant skoued, ma Yannig en deus daou;
 Pa deuy an neve-hanv 'vo diskleriet an traou....

Prenet e vo eur vloc'h ha savet eun ti plouz
 Du-ze, 'tal ar feunteun, en draouiennig didrouz.

Eno, pell diouz ar bed hag holl d'he c'harante,
 Mitez Breiz-Izel a gano noz ha de!...O!

Kculmig Arvor.